

20 vloaz a Startijenn



C'hwec'hvet pladenn Startijenn, anvet Paker Tour - Live, a zo deuet er-maez d'an 18 a viz Du, disheñvel diouzh Skeud abalamour ma oa bet enrollet war-eeun da vare an hañv. Emgav gant Tangi ar Gall-Carré, paotr e voest an diaoul, Tangi Oillo, paotr e c'hitar ha Youenn Roue, paotr e vombard.

Ho eil pladenn *live* eo, petra a cheñch e-keñver El-Taqa [s.o. *Bremañ* niv. 371] ?

Tangi ar Gall-Carré : Distro eo ar strollad d'e stumm kentañ, gant pemp soner, ha gant ar c'hoant da adkavout energiezh an dañs hag ar fest-noz. Pa n'emañ ket mui ganeomp Kaou Gwenn [an tabouliner] e cheñch an traoù evel-just. Dav e oa bet da bep ezel adaozañ e zoare da seniñ ha ken nerzhus eo bepred. Rock'n'roll e chom.

Petra eo an diaesañ pa enroller diwar al leurenn ?

TaGC : Seniñ difazi a-hed ur sonadeg ha mirout an hevelep startijenn bepred, evit ma chomfe an dud e-barzh hor sonerezh da vat. Pa enroller en ur studio e soner pep hini d'e dro, n'eo ket ar memes mod d'ober tamm ebet. Ur seurt adrenalin zo oc'h enrollañ war-eeun.

Petra 'vo graet da-geñver hoc'h 20 vloaz ar bloaz a zeu ?

TaGC : Mennozhioù hon eus. Ur mell fest-noz-ha-sonadeg a vo gant mignoned, sonerien. Krog omp ivez da labourat war ur groudigezh evit lidañ se war un ton bras.

Pere eo hoc'h eñvorennoù plijusañ gant Startijenn ?

Tangi Oillo : Evit lâret ar wirionez eo diaes-kenañ choaz e-touez an toullad traoù brav hon eus bevet asambles. Peadra a vefe da

sevel ul levr ! Ar beajoù zo an dro da vevañ traoù plijus-kenañ atav.

Youenn Roue : Gouel-lid 15 vloaz Startijenn e Konk-Kerne e 2013. Un nozvezh aozet ganeomp gant sikour Bagad Konk-Kerne. Pedet hor boa war al leurenn kamaladed El-Taqa, ar re nevez er strollad d'ar mare-se, Julien Stevenin ha Lionel Le Page, ha Konogan an Habask. Fromus-kenañ e oa. An nozvezh-se a chomo garet em memor.

TaGC : Sonadeg El-Taqa e festival Rudolstadt en Alamagn. Ar wech kentañ e oa deomp seniñ ar groudigezh-se en estrenvro. Degemeret mat-kenañ e oa bet hor sonerezh gant an dud eno !

Traoù droch zo c'hoarvezet deoc'h dindan tost ugent vloaz ?

T.O. : E 2011 e oamp aet da seniñ da v-Malaysia en enez Borneo, gant tri c'harr-nij disheñvel. Ur wech erru eno e oa bet kollet malizennoù unan ac'hanomp. Setu-eñ hep benveg sonerezh na dilhad, e penn all ar bed. Erruet e oant deiz a-raok an abadenn, dre chañs.

Y.R. : Ur wech e oamp o vont da Château-Thierry da seniñ. Harzet e oamp bet gant archerien abalamour d'an tizh. Dale war-nomp forzh pegement neuze. Tu a oa deomp, marteze, da seniñ diwezhatoc'h gant ma klozfemp ar gouel. Setu-ni en

hent, laouen ha fier eus hon tro-gamm... Erru war al lec'h e oa dibosupl a-benn ar fin. Re ziwezhat. Aet e oamp neuze d'ur sonadeg gant Soldat Louis !

TaGC : N'eus ket keit-se omp bet skarzhet diwar leurenn ur fest-noz gant an aozer, goude a-boan un hanter- eurvezh. Hervezañ hor boa da gregiñ abretoc'h, padal e oa bet paket dale gant ar strolladoù all ha gant ar staliañ. Dipitet-kenañ e oa an arvesterien.

Eñvorennoù fall pe displijus hoc'h eus dalc'het soñj enno ?

T.O. : Mareoù displijusoc'h zo bet evel-just met disoñjet e vezont buan, dre chañs. Abaoe an amzer omp boas d'ober an eil re gant ar re all. Laouen omp o seniñ asambles, plijadur zo ha da'm soñj e vez gwelet. Ar startijenn, ar blijadur, hor boa c'hoant da ziskouez dre ur bladenn, setu perak hon eus enrollet *live*. Ur seurt pol-tred bev eus ur fest-noz eo, just a-raok lidañ hon 20 vloaz.

Y.R. : Ne'm eus eñvorennoù fall ebet. Plijadur zo, traoùigoù dipitus a-wechoù, netra fall avat. Gant ma pado !

TaGC : An eñvorennoù fall a vez disoñjet diouzhtu, a gav din... Ugent vloaz a blijadur hepken !

Komzoù dastumet gant Valérie Kervella

Evit gouzout hiroc'h : www.startijenn.bzh